


inbouch'h



KELAOUENN A STUDI

Niverenn 136

30 Ebrel 1981

Dont a raio niverenn miz Mae er-maez a-
benn teir sizhun bennak..

Niverenn miz Mezheven a vo gouestlet,
moarvat, d'un oberenn distag.

Ar re n'o defe ket paeet c'hoazh o
c'houmanant evit 1981 a zo pedet d'henn
ober an abretañ ar gwellañ.

oooooooooooo

INTEGRAH. KEMERADUR A STUI

Dauarnket bloavañ

Riverenn 138

Kemeradur
 Dilion o kerdh da fador en
 Burtellenn
 Bloaz nann an Aotrou Perrot
 Prezeger diatger gent KERN
 gent peus eo gant frouezh an
 fador for e fadenn
 Dilion diwar-benn fador en
 Kemeradur

Kemeradur-bloaz : 10 Iar, E
 c'honnaner ha peñs a re
 abegadur evit peñs ha
 alioñ ar re a gerdh peñs.

Peñs an riverenn-mañ : 10 Iar
 A. Burtellenn, ha no da
 A. Burtellenn, Rostren

Riverenn-mañ : 30 OI

Kemeradur-bloaz : 10 Iar, E
 c'honnaner ha peñs a re
 abegadur evit peñs ha
 alioñ ar re a gerdh peñs.

NOTENNOU POLITIKEL

Taol-strap ar vilourion spagnat

Diwezhadik eo evit komz eus arnod an vilourio spagnat da ziaezañ ur renad eus an tu-dehoù pellañ e Madrid. A-ziwar-lerc'h ez eus tu koulskoude d'ober un nebeut evezhiadennoù.

Ar goulenn a c'hell unan ober dezhañ e-unan eo perak eo c'hwitet ur wech ouzhpenn an taol-esa da ziazezañ pe da virout ur renad dehouat beliellour e-barzh unan a riezoù Europa ar C'hornog abaoe dek pe bemzek vloaz. Kounañ a zleer en degouezh-mañ striv an OAS, ar gwall-daolioù a-enep da zDe Gaulle, c'hwitadenn ar c'hlevgadourion c'hresian da zerc'hel en e sav ar renad beliellour o doa savet, steuziadur ar renadoù salazarat ha frankoat e Portugal hag e Spagn.

Eveljust e vo lavaret ha - ha ganeomp eo bet ivez, - n'o dije ar renadoù dehouat beliellour riez veur ebet gouest d'o harpañ en Europa, evel maz eo c'hoarvezet etre an daou vrezel (n'eus forzh penaos, ne glote ket penn-da-benn - nag a-bell - renadoù Spagn ha Portugal neuze, gant re Alamagn pe Italia ; an enep-

komunouriezh hepken a bourchase un talbenn boutin dezho hogen diforc'h a-grenn e oa o fennaennoù hag o awenadur e keñverioù zo).

Hogen, eveljust, un diskleriadur all ez eus. Ar sevenadur kevalaour armerzhelour m'emañ an tu-kreñv gantañ en Europa diwar vremañ n'en deus ket ezhomm eus renadoù hollveliek evit ober berzh hag en em ledañ. Uhelvennad - mar geller lavarout, - eorizh enta, mar kavit gwell, ar sevenadur-se a zo krennet e ger-stur bourc'hizion c'hall an naontekvet kantved : 'Dastumit madoù ha pinvidigezh!' Lazhet en deus ar sevenadur-se ar gevredigezh plouezat henvoazel m'en em skore an Iliz warni betek hiziv (alese, a-hend-all, enkadenn an Iliz hec'h-unan eveljust.) War gevredigezh plouezat hag an Iliz o dije dleet ar vilourion spagnat en em harpañ evit kas da wir o dezo, hag ar re-mañ dres eo a vanke.

Diouzh un tu all dislañset eo broadelouriezh impalaour ar riezoù frankizour aet war-raok (Spagn en o zouez diwar vremañ) gant dibenn ar grez trevadennel, ha se a zo gwir diwar-benn an holl riezoù europat hengounel, - ha diwanadur ar bloc'hoù kevandirel armerzhel-politikel ; disoc'h pouezus nemetañ ar brezel diwezhañ eo bet emziskouezidigezh ar pennoù-ahel politikel-armerzhel nevez. E diabarzh ar bloc'hoù ne c'hell mui bezañ a genstokoù, ha strivañ a ra ar C'henvarc'had a-hend-all da lemel ar re a c'hellfe sevel war dachenn an armerzh. Gant an emdroadur-se ivez e teu broadelouriezh ar riezoù hengounel europat da goll he ster. Un enebour o deus hepken hag ouzh hennezh ne c'hellont ket talañ a-unanoù. Hag en anv petra ivez ? N'eo ket mui gouest kealiadurezh ar frankiz, - a-hervez - da entañ pobloù a zo kollet ganto pep skiant reli-

jiel, ha n'o defe da zifenn ar frankiz nemet evel un tu da genderc'hañ muioc'h ha da gar-gañ tennoc'h c'hoazh ur c'hof a zo leun-tenn dija. Ar frankiz a reer van da zifenn a zo ur frankiz c'houllo peogwir ne gensell nemet un den kollet gantañ e zenelezh en ur reizhiad a laka war ar memes pazenn an dud hag ar moc'h a servij da vagañ anezho.

War ar marc'had ez eus bet lakaet e penn ar Stadoù a-wechoù, e-giz margodennoù, renerion eus an tu-dehoù, rouaned zoken, evel ma weler diouto c'hoazh e Saoz, Izelvroioù, Belgia pe Spagn, a zo o roll dispontañ bourc'hizion zo o reiñ dezho da grediñ n'eus kemmet netra er gevredigezh m'o deus bevet enni gwechall - margodennoù, a lavaremp, ha netra ken, eveljust. Ar re-se n'o deus ken da bal nemet mirout o flas ar pellañ ma vo tu rak ur plas mat ez eo. Sur, n'eo ket ar re-se a vo gouest da ginnig d'ar pobloù un uhelvennad bennak da zifenn.

Lemel anezho kuit, a-hend-all, - evel m'he deus klasket ober an OAS o kas lazhañ de Gaulle - ne gemme netra en afer. N'eus forzh penaos e vo kavet ur Jiskar pe ur Chirac bennak da c'hoari an hevelep roll.

Ar pezh a fell deomp lavarout eo kement-mañ : ar fazi a vez graet gant an holl re a garfe kemm ar gevredigezh, a-gleiz pe a-zehoù e vent, eo krediñ ez eus tu da seveniñ un dra bennak dre ar c'hoari politikel. Rak n'eus galloud ebet da gemer er gevredigezh dre ar Stad o vezañ ma n'eo ar Stad nemet evodadur ar gevredigezh werc'hel. Ur gevredigezh nevez eo a zo da sevel, nemet er-maez eus ar Stad, hag evit ar gristenion dre an Iliz hepken. Pegeit amzer a c'houlenn seurt mennad da vezañ kaset da benn ? Un amzer gwall hir moarvat

rak an Aotroù Doue ne vez ket preset morse : un abeg ouzhpenn evit kregiñ diouzhtu gant al labour, hag houmañ eo ar gentel a zo da denañ diouzh difretadennoù dispac'herion berr-boell a bep seurt.

Abadenn an nevez-amzer e Plogoñv ha Lun-Fask e Koat-Kev

Da Sul-Fask e oa bet aozet un emgavadeg e Plogoñv evit enebiñ ouzh mennad ar Greizenn Derc'hanel. War a lavar ar c'hazetennoù o deus un 30.000 bennak a dud kemeret perzh en diskeladeg, en o zouez emsaverion ha, peurgent, izili eus SKOL AN EMSAV. Un den e-giz Haroun Tazieff, paotr an tanvenezioù, a oa deuet da skoaziañ an enep-derc'hanourion (hag ar Strolad Sokialour Gall, war a lavarar din).

Liesseurt e oa enta mennozioù ha savboentoù an amvevadourion o deus aozet ar vodadeg-se, ha na voe ket berzet, marteze dre m'emeur erru e koulz dilennadeg an Arlevier e Bro-C'hall. Diskleriet hon eus meur a wech n'omp ket evit lodañ bepred savlec'h an nagennourion a eneb ouzh an derc'han. Hiniennoù eus ar re-se, da skouer, a zifenn ur gwir da vezañ disheñvel en anv ur frankizouriezh pe un naturelouriezh ha n'o deus ket kalz a ster evit kristenion, a gav din. Prest e vefe an naturelourion, lakaomp - da zifenn ne vern peseurt stuzegezh, elese, da nac'hañ pep divez ha pep gwirionez diwarbenn an den, en anv n'ouzon peseurt frankiz. Dalc'hidi ar gealiadurezh-se a garfe mirout Eskimoed hag Indianed e-barzh mirvaoù hep darempred gant ar bed arnevez, hag er-maez eus pep istor (ne lavaran nepred an Istor rak merket hon eus alies a-walc'h e oa meur a

Istor). Notomp a-hend-all n'eo ket nevez an albac'henn-se, - un albac'henn vourc'hi-zion a-gozh war glask ar 'bons Sauvages', o deus bet kement a blijadur o kavout anezho e-barzh oberenn ar Gall brezhoneger Per-Jakez Helias, en deus gouezet livañ gant kement a ampartiz, e galleg, na petra, buhez ar ouezidi -se a veve ergentaou en Arvorig, tu bennak tro-dro da Bont 'n Abad.

Ma ! N'eo ket eus an dra-se e felle din hogen eus difenn eskopti Kemper da lidañ un oferenn arbennik evit an amvevadourion gristen a oa deuet da gemer perzh en diskeladeg. En dro-mañ ez eus bet lavaret dezho n'o devoa d'ober nemet mont d'an ilizioù parrez er C'hab o vezañ ma oa an oferenn arouez an unvaniezh etre ar gristenion. Hag el lizher-kemenn a voe embannet er c'hazetennoù e oa gourbonnet e oa an Iliz un aozadur urzhazek, ha n'eo ket unan gwerinveliek, ul lañgaj nerzhus ha n'oamp ken boazet da glevout abaoe ur pennad amzer, hag a rofe da gounañ, sur, Vatikano I, kentoc'h eget Vatikano II.

Kadarnaet eo bet an difenn-se gant an hini a verze ouzh ur person a Dreger dont da lidañ un oferenn all da Lun Fask e Koatkev, war diriad parrez Skrigneg. Dija warlene en doa nac'het person ar barrez-se e vije lavaret an oferenn e-barzh chapel Yann-Vari Perrot, da geñver Lun Fask m'o doa Kristenion Breizh kemeret perzh ennañ.

A-raok burutellañ diviz eskopti Kemper avat e karfen diskleriañ peseurt abegoù mat a c'hellfe bezañ dezhañ. Evidon-me ez on bet enebet a-viskoazh ouzh an oferenoù politikel lidet e-kreiz un diskeladeg bennak, evel un abadenn folklorek, etre un abadenn dañs hag

un abadenn sonerezh (poblek) bennak. Re alies eo c'hoarvezet an dra-se e-kerzh an dek vloaz diwezhañ war lez an emsav evit ma c'hellfemp diveuliñ a-grenn ha war an taol disentez an eskopti (1).

Hogen, evelkent, na roomp ket re vuan an absolvenn da renerion eskopti Kemper, a-raok bezañ sur e veritont anezhi. Rak daoust ha ken glan-se e oa o mennad ? 'M eus aon n'eo bet awenet hemañ nemet gant ur gouzelouriezh politikel - berrwel a-walc'h, d'hor soñj, - ha gant an aon rak feukiñ ur galloud pe un danvez galloud a zo. En liz c'hall - Kemper n'eo nemet un eskopt gall e Breizh - kement ha ma ouzon, ez eus bet aozet alies abaoe dek pe bemzek vloaz, oferennoù folklorek, gant bennozh ar pennadurezhioù a-berzh-liz, ha kement-se en anv un obererezh katolik lieskefridiet : ret e oa derc'hel kont, 'keta, eus stuzegezhioù an amrizh kendereoù a zo oc'h amparañ ar gevredigezh c'hall arnevez, ha prezeg an Aviel gant muioc'h a wirionez d'ar boblañs en ur yezh hag en ur stumm e oa gouest da gompren. Neuze 'ta, perak chom hep darbenn evel kristenion leunperzhiek an amvevadourion pe an emrenerion a oa en em gavet e Plogoñv da Sul Fask ? Pa ziskouezer a-hend-all kement a zamant er c'hontrol evit micherourion ar JOC a zo ken tost da galon ar PCF? Nemet, siwazh, e-giz dre zegouezh e vefe, emañ Plogoñv tost-tre da Zouarnenez a zo renet gant gant ur maer ezel eus ar PCF (ur strollad sirius, gwir eo, - n'eo ket evel hor paour-kaezh UDEBEIG!) Ha Skrignag, war am eus klevet ivez, a zo kerkoulz all ur glad eus an hevelep strollad gall... Setu arabat eo reiñ da soñjal

d'ar re o deus dija un tamm mat a c'halloud er vro hag a c'hello bezañ mistri ar Stad war-c'hoazh e vefed enebet an disterañ outo, 'keta! Arabat bezañ broc'het ouzh ar C'hezar a hiziv, Jiskar, a zo a-du gant an nukleel, hag an danvez Kezar a warc'hoazh, ar c'hamarad Marchais a zo ken start all a-du gantañ. Setu a-benn ar fin, daoust ha ne vefe ket awenet politikerezh eskopti Kemper - rak n'eus anv amañ nemet eus politikerezh - nemet gant an dispriz ouzh stourmerion ha n'o deus chañs ebet da drec'hiñ, an emrenerion dec'h hag hiziv, hag an amvevadourion hiziv. Kompren a reomp ez eo diaes da bennadurezhioù an liz chom neptu : lezel skolaj Pont-Kroaz da lojañ ar warded-heloc'h a zo sevel a-du gant an amaezhiezh ; nac'hañ henn ober avat a zo sevel a-du gant ar re a eneb ouzh an derc'han ha diaes eo gortoz a-berzh tud a zo bet boazet a-viskoazh da sentiñ ouzh ar veliezh politikel, goude ma washfe anezho, ez afeñ en un taol gant un hent dispac'hel pe zamzispac'hel ; rak, siwazh adarre, gant frammoù an liz e Breizh emañ en e washañ moarvat an tech d'ar c'hemplegerezh kevredigezhel, un tech a zo, dre vras, gant ar pobloù trec'het ha sujet, hag a vir outo ivez a stourm ouzh an tuadurioù hag ar gizioù kefredel a ra o reuz en liz c'hall hag a gas houmañ d'an traoñ (seurt tuadurioù ha gizioù n'int e gwirionez nemet un heklev eus re ar gevredigezh c'hall lik kempred).

Dres ivez, peogwir e oa anv eus urzhaz ha beliezh e lizher-kemenn an eskopti e Kemper, en em c'houlenn a c'heller ha ken prest-se eo renerion an eskopti-se da sentiñ ouzh Roma ha ma rofe da grediñ an dave d'an urzhaz a gaver er skrid embannet ganto. Ma trofe e

stourmerion Kristenion Breizh ober un enklask diwar-benn pleustrezhioù relijiel zo e parrezioù eskopti Kemper ne vefe ket tenn dezho moarvat dizoleiñ ne zalc'h ar veleion eno kont ebet eus hetoù pe gemennadurioù Sez Roma, - da skouer evit a zo eus an absolvegoù bet difennet groñs gant ar Pab hag a vez pleustret en holl barrezioù koulz lavaret ; heñvel, e nouspet parrez e vez darnaouet ar gomunion gantne verñ piv e-giz pa vije bara benniget, hep derc'hel kont eus ar reolenn diazezet e Roma... H.a. Da betra e servij neuze da renerion an eskopti engervel urzhaz ha beliezh pa ne sentont ket zoken ouzh ar Pab ? Me ' oar n'eo ket ouzh ar Pab e fell dezho sentiñ, - ouzh kembod an eskibion c'hall, ne lavaran ket ! Anzav a reot evelkent e hañval lu un tammig goude-se kaporalouriezh paotred-burev an eskopti.

Hogen n'ouzomp ket peseurt fiziañs a c'heller kaout e Breizh end-eeun en eskibion zo ha n'o deus da destenn diviz gant o fideled pa gejont ganto (ha se ne c'hoarvez ket alies) nemet priz ar patatez hag ar c'hig-moc'h(gwir eo, roll ar c'hweluniadoù, re ar gouerion dreist-holl, selaouet e Brussel, a zo pouezusoc'h evit tonkadur an Denezh eget hini strollouigoù an amvevadourion pe an emrenerion, pe zoken hini an Iliz hec'h-unan, sur !)

Moarvat ne zlefemp ket bezañ e chal kement gant an Iliz c'hall e Breizh, a zo oc'h ober he zalaroù (kredapl eo e vo ret gortoz beleion eus Polonia evit adsevel ar feiz e Breizh). Hogen, daoust ha n'emañ ket an Iliz-se o steuziañ dre maz eo gall ha ma nac'h degemer ar fed breizhat war zigarez n'en deus ket un dalvoudegezh staderel ? Politikerezh eskopti Kemper ez eo bet derc'hel kont eus ar yezh hepken

diouzh ma oa unyezherion eus ar Vrezhoneg (an hevelep politikerezh a zo bet heuliet ivez en eskoptioù all eus Goueled ar Vro) ; ne oa ket dav stourm evit ur yezh a oa dilezet gant ar boblañs, - e-giz pa ne vije ket bet an dilezidigezh-se frouezh ur saviad politikel direizh a oa stagidigezh Vreizh ouzh Bro-c'hall diouzh un tu, ha skrapidigezh ar c'helenneriezh gant an amaezhierzh stadel gall. Degemeret o deus atebion an Iliz c'hall e Breizh savboentoù politikel ar Stad c'hall ha sellet ouzh ar gallekadur evel un dra reizh, - pa ne oa ket. N'o deus stourmet a-zevri biskoazh evit ar yezh (graet o deus van, ha setu holl). Met penaos ivez goulenn digant an dud-se stourm da vat evit ar yezh pa n'int ket evit stourm a-zevri evit ar feiz ? En eskopti Kemper koulz hag en eskoptioù all e Breizh o deus atebion an Iliz dilezet mennad ar skolioù kristen a zo deuet da vezañ adskolioù an Deskadurezh Vroadel c'hall, ha n'int ket mui gouest da stummañ kristenion (neuze, da betra e servijont?) Ha padal n'eo ket dic'hallus tamm ebet sevel skolioù kristen peogwir e teu a-benn stourmerion DIWAN da zerc'hel o skolioù brezhonek en o sav. Ma fell da atebion an eskopti e Kemper diskouez ez int kristenion ha Breizhiz, petra a c'hedont evit sevel gwir skolioù kristen ha brezhonek evit bugaligoù Vreizh, hag addeskiñ dezho ar feiz hag ar yezh, - pezh na c'heller ket ober er skolioù reolet ez-eeun pe -ameeun gant ar Stad ? Nemet, setu, moarvat eo dever kentañ ar gristenion e Breizh bezañ doujus ouzh ar Galloud dalc'het gant bourc'hizion ar Stad c'hall, marksour pe get !

Levr J.M. de Lachaga
diwar-benn Ilizoù goubarzhef

Setu an daeadenenn a reomp d'ar re a zo e penn an eskoptioù e Breizh : diskouez ez int gouest da vezañ blenierion ur bobl nevez a grouo ivez ur sevenadur nevez dre ur yezh nevez ha n'eo ket mevelion ur gailoud ha na bado ket gwall bell diwar vremañ.

O c'hortoz, mat e rafent o lenn ul levr emañ o vont da vurutellañ bremañ hag a c'hellfe, marteze, sklerijennañ o speredoù war ar c'hrafoù am eus damveneged en notennoù-mañ. Talbenn al levr a zo : J.M. LACHAGA.- Eglises particulières et minorités ethniques.- (Paris) Le Centurion (1978).- In-8°, 288p. ("Ilizoù goubarzhel ha maeskenelioù")

E gwirionez n'eus ket bet embannet kalz levrioù gant tud a Iliz diwar-benn kudenn an Ilizoù goubarzhel ha maeskenelioù. Implijout a ran ar ger 'maeskenelioù' evit treiñ 'minorités ethniques' hogen an termen-mañ, ret eo lavarout, n'eo ket gwall resis rak talvezout a rafe a-benn ar fin, war un dro, pobloù distad, nemet dezho un douar hag un istor stag ouzh an douar-se, hag an 'advroadennoù' skignet e-touez poblañsoù estren outo en amgant ur riez pe un impalaeriezh bennak.

Diaes eo reiñ ur c'hrennad eus ul levr tev ha fetis evel hemañ, e-lec'h e tistro an aozer meur a wech war an hevelep testenn. Dre vras avat e klask J.M. de Lachaga reiñ ur ster d'ar stourm kenelel oc'h en em harpañ war hengoun an Iliz, skridoù kefridiel ar Goursened diwezhañ diwar-benn an Ilizoù goubarzhel end-eeun, hag addisplegoù pe studiadennoù embannet e ser ar Goursened-se gant skrivagnerion a glaske diorren ar c'hemennadurioù anezhañ. Evel-se e vez meneget a bep eil arroudennoù diwar oberennoù G. Fessard, Y.

Congar, de Lubac h.a.

O vezañ ma oa an aozer un Euskarad e soñje deomp en doa un dra bennak da lavarout en dije klotet gant saviad ar Vrezhoned ha mennadoù an Emsav. E devoud ez eo restet gantañ tu bennak el levr skrid P.J. Helias:"Ar Marc'h Ougouilh", aozet gant un hendraouer da daolennâñur stuzegezh hag ur boblad aet da get, - pe oberennoù Guy Héraud a voe brudet e deroù ar bloavezhioù seikont.

Gwelout a ra ar skrivagner e donezon ar yezhoù da zeiz ar Pantekost un arouez eus roll ar pobloù liesseurt e diorreidigezh ar C'heloù-Mat embannet gant an Aviel : mennet eo bet gant Doue amrizhded ar sevenadurioù. Da virout ez int enta diouzh maz int enframmet e rak-tres Doue o krouiñ ar bed ha kevredigezh an dud.

Ret eo anzav a-hend-all n'o deus ket ar gristenion emouezet diouzhtu ouzh piaouelezh an talvoudoù denel, hini ar vroad hag ar vuhez politikel dre vras, eme ar skrivagner, dalc'het ma oa o spered, - pezh a oanatur, gant embann an Aviel ha Keloù-Mat ar Silvidigezh, forc'het ma oant a-hend-all diouzh pep buhez forañ, heskinet hag handeet, rediet d'en em guzhat e-pad prantadoù hir a amzer. An aesañ e oa dezho kemer ar yezhoù a oa ar muiañ anavezet en Impalaeriezh roman, da lavarout eo, al latin hag ar gresianeg. Evit abegoù pleustrek, war a seblant, e reas ar visionerion gristen gant yezhoù all e kantvedoù kentañ istor an Iliz, sirieg, slavoneg, goteg : gouzout a reer e voe troet an Aviel e goteg. An Iliz n'he doa na damkaniezh na politikerezh frammet diwar-benn implij ar yezhoù hogen arabat e vefe ivez krediñ e oa doareet heñvel kudenn ar yezhoù ouzh an hini a sav hiziv en Europa

da heul un istor hir a vruzhunadur politikel. En henamzer ne oa ket a rannyezhoù hag an hevelep keltieg, da skouer, a oa komzet eus Galatia da Breden, hervez sant Jerom er pevare kantved. Ne oa ket bet kont evel-se atav rak ar gresianeg, da skouer, a oa bet arveret dindan stummoù rannyezhel un nebeut kantvedoù kent met dre vras ne oa en implij nemet yezhoù lennek ledet penn-da-benn da rann-dioù ec'hon evel an arabeg hiziv pe ar sinaeg. Padal, e keñverioù all, en em gave ar yezhoù bras en henamzer en ur saviad damheñvel ouzh hini hor broioù bihan dre ma oa dister-tre niver an dud a ouie lenn ha skrivañ, ha da gemer perzh en ur vuhez kefredel bennak, hag izel-kenañ ivez kementad ar skouerennoù a veze tennet eus ul levr bennak, an holl o vezañ eilskrivet gant an dorn, bout maveajè ar skrivagnerion eus ur penn d'egile eus an impalaeriezh roman, evel m'en diskouez an "Notennoù a Batrologiezh".

E Kornogeurôpa ez eo bet krouet ha skignet ar sevenadur hag ar stuzegezh kristen dre al latin, ur yezh avat ha na zeue ket er-maez eus amgant an Iliz (leandioù h.a.), a zo bet implijet keit-ha-keit gant ar yezhoù lec'hel en hor broioù met bepred war un dachenn strizh-kenañ, evit al latin zoken. Ne oufed enta, e nep stumm, keñveriañ ar saviad a hiziv ouzh hini an amzer-hont. Biskoazh n'eus bet moulet kement a levrioù brezhonek daoust maz eo peuzvarv ar yezh war vuzelloù tud ar werin hiziv. Ret eo lavarout ne oa ket tu er grennamzer uhel hag izel ober gant danvez yezhoù a oa oc'h emdreiñ buan ha na oant ket bet digemmet gant ul lizheradur bennak evit eztaoliñ kealioù skoemp ar brederouriezh, daoust maz eus bet klasket ober se gant ar brezhoneg e-

giz m'en laka anat an notennoù-diskleriañ a gaver e marz an dornskridoù latin a zo deuet betek ennomp.

Setu perak ne gomprenomp ket mat e tamall-fe ar skrivagner d'al latin - ha na oa ket yezh ur galloud stadel kreizennet er grennamzer, bezañ noazet ouzh emled hor yezhoù. Er c'hontrol, a gav din, c'hoariet en deus al latin neuze roll ur skramm etre an danvez yezhoù arnevez ha miret outo a gevezañ kene-trezo. Miret en deus peurgent ouzh ar galleg a gemer e greñv war ar brezhoneg e-pad pell amzer. Ret e vo gortoz an XIXvet kantved kent na drec'ho ar yezhoù stadel impalaour arnevez en Europa. Moarvat evijesteuziet ar brezhoneg hiziv m'he dije asantet an Iliz er XVIvet kantved - evel ma reas ar brotestanted, da zegemer ar yezhoù 'broadel' el liderezh rak graet en dije ar Stad c'hall he mad eus an degouezh-se evit gallekaat holl boblañs he ziriegezh (kv. tonkad ar c'herneveg e Breizh-Veur da heul an disivoud) ; setu, mirouriezh Iliz Roma he deus saveteet dazont hor yezh, marteze ! Moarvat kement-se holl a zo c'hoarvezet dre zegouezh met war an dra-se e ranker pouezañ ivez en un amzer ma vez prest pep hini en emsav evel e-lec'h-all da gendaoniñ al latin.

Ar wirionez eo he deus ezhomm an Iliz eus ur yezh dreistbroadel ha na c'hell bezañ nemet al latin.

Hogen lezomp an distro-prezeg-se ha pledomp a dostoc'h gant testenn al levr emamp o vurutellañ. A-benn ar fin, pezh a glask prouiñ an aozer eo ne c'hell ket an Iliz chom bev nemet klenket e vefe en un douar hag en un amzer resis, en ur gevredigezh unvan er par lec'hel. Unan eus dodennoù an oberenn eo e tle an Iliz en em azasaat

ouzh an amveziadoù m'en em gav enno en ur vroeze bennak, - un dodenn maz eus bet breutaet a-walc'h diwar he fenn e-pad ar Gourse-ned diwezhañ (rak-se ivez e vez meneget ken alies skridoù Y. Congar, ur Breizhad a orin anezhañ, moarvat). Goulenn a ra ar skrivagner peurgent e ve lezet un tammig a-gostez pennaenn an eskopti douaregorel, ha darbennet en he c'hichen hini an eskopti kevredadel. Rak-se e c'houlenn evit Euskariz annezet er Stadoù-Unanet (d'ar re-se ez eo bet an aozer aluzenner) ar gwir da gaout eskibion (pe adeskibion) a ouenn ganto, ha kement-all evit ar maeskenelioù all divroet er rannved-se, da skouer.

Dre vras, setu tezenn ar skrivagner. En amzer vremañ, er sevenadur a zo o ren, heloc'h ar boblañs, tolpet er c'hêrioù, distrujet frammoù ar gevredigezh plouezat a wechall, ez eo deuet poent neveziñ ivez frammadur an Iliz hec'h-unan ha diazezañ anezhañ war an tudadoù o-unan kentoc'h eget war an tiriadoù e-lec'h e c'hell en em gavout kej-mesk poblañsoù a bep seurt. Distreiñ a rafemp da varevezh an divroadegoù meur eus deroù hor grez, pa heulie ar venec'h vrezhon an tudadoù brezhon en o dilec'hiadegoù war zouar Arvorig.

Un tamm gwirionez a zo en dezrann-mañ ha moarvat e tlefemp bezañ laouen o welout un den a Iliz o kemer preder gant lec'h hor c'henelioù en Iliz. Da gentañ avat e c'heller en em c'houlenn ha klotañ a ra an dezrann kement-se gant saviad gwirion ar c'henelioù en Europa end-eeun, en deiz a hiziv. Dav eo anzav, da skouer, n'eo mui pobl Vreizh e 1981 na brezhon na kristen da vat, daoust maz eo chomet brezhon ha kristen betek nevezik zo. Dre ar skolioù reolet ez-eeun pe -ameeun gant ar

Stad, dre ar yoc'hstlenn hag ur Wask awenet gant pennvonioù ar 'gevredigezh aet war-raok' a-gleiz pe a-zehoù e ve, digristen-rik avat, he deus kollet ar bobl vrezhon ar perzhioù spere-del dibar a roe dezhi ul lec'h a-ziforc'h e-touez ar pobloù. E Breizh n'he deus ket an Iliz d'en em azasaat ouzh ur gevredigezh vrezhon diseurt, - ouzh ar gevredigezh c'hall dre vras, ne lavaran ket. Ha setu digarez kaer eskopti Kemper evit nac'hañ derc'hel kont eus an nagennerion hag an drubuilherion a zo er-maez eus ar gevredigezh-se.

Pezh a chom evelkent ez eo koulskoude un emsav a fell dezhañ bezañ - a zlefe mennout bezañ - pep tra e Breizh, ha nad eo netra nemet un Diwan eveljust (evel ma vez lavaret ken mat), un emsav a glask e hent forzh penaos, hag a zo e chal gant pep tra nemet gant ar feiz he deus awenet Pobl Vreizh a-hed ar c'hantvedoù.

Ret eo anzav adarre enta ne zere ket tezennoù ar skrivagner, peurvuañ, ouzh mennadoù ha palioù an emsav, ha ne c'heller ket bezañ souezhet gant se. Anat eo ne soñj ket Congar - meneget aliesik el levr - e degouezh e vroeñ pa ziskleir e tle an Iliz en em azasaat ouzh ur gevredigezh pe un sevenadur, - e meur-riadoù Afrika, Azia, Amerika, en Trede Bed dre vras, daoust maz eo faziet an aozer-mañ koulz ha Lachaga e-unan o krediñ e c'hellfe stuzegezhioù orinel ar pobloù tramor padout kalz pelloc'h eget re hor c'henelioù-ni. O vezañ ma n'emañ ket Breizh en Trede Bed forzh penaos ne c'hell ket hec'h emsav bezañ kemeret a-zevri gant ur skrivagner ken sirius hag Y. Congar. 'M eus aon e soñj seurt feizonourion c'hall, kentoc'h, er vicherourion e Bro-C'hall, (pe er broioù all eus Kornogeuropa dre vras)

dezho ivez ur stuzegezh arbennik, nemet kalz pouezusoc'h evit dazont an denezh eget emsavig Breizh ; a-benn ar fin n'eus anv amañ nemet eus 'obererezh katolik arbennikaet'.

En degouezh-mañ avat e kejmp gant un diaester hon eus bet tro da dalañ outañ meur a wech. Daoust ha sur eo e c'hell ar feiz atoriñ kement a zo en ur sevenadur kresket ha diorreet er-maez anezhi ? Petra tennañ eus krevezioù pe brederouriezhoù bet kresket diwar gilstourm hag enebiañ outi (Islam pe varksouriezh pe n'eus forzh peseurt kelennadurezh arnevez) ? 'M eus aon e vo ret d'ar gantroidi 'skarzhañ an daol' da staliañ warni listri nevez a-grenn.

Diouzh un tu all hag er c'hontrol, daoust hag empennañ a c'heller ur c'hristen ma ve dianav dezhañ an Testamant kozh pe an Testamant Nevez ha skridoù Tadoù an iliz, Gresianed ha Latined ? Daoust avat ha ne ranker ket degemer n'eo ket nepstuz ar skridoù-se maz eo bet dasroet ar feiz deomp a-dreuz dezho ? En ur stuzegezh resis, diwanet diouzh istor Pobl Israel e-unan, ez eo gwriziennet an Aviel.

Deomp war hor c'hiz. Hor stuzegezh hag hor sevenadur-ni a-hed ar c'hantvedoù, betek derc'hent-dec'h ha dec'h, a zo bleuniet diwar ar feiz kristen hec'h-unan ; eztaolet o deus ar feiz, hag evit adlavarout ar pezh am eus lavaret kant gwech, di-ster ha dieulad e teuint da vezañ en deiz m'he devo poblañs ar vro-mañ distaolet ar feiz da vat (evel peulvanou an tudadoù a boble al ledenez-mañ pevar-mil bloaz zo). Ha neuze, penaos he dije bet an an iliz d'en em azasaat ouzh ar stuzegezh vrezhon derc'hent-dec'h ha dec'h pa oa bet stummet ganti end-eeun ! Gwelout a reer ne glot ket tezennoù zo eus ar Goursened adveret gant

Lachaga gant degouezh an Emsav ; ha dreist-holl ez eo dall an tezennoù-se ouzh un devoud a c'hellergwiriañ a-hed an istor : bez' ez eo bet ar feiz a-viskoazh krouerez a stuzegezh hag a sevenadur drezi hec'h-unan hag aet eo da get er broioù m'he deus kollet he galloud-krouiñ end-eeun.


Ur fazi all a ra ar skrivagner eo krediñ evel nouspet re all n'he deus pouez ur stuzegezh nemet diouzh maz eo un anadenn a yoc'h, pe c'hoazh ez eo ar stuzegezh un anadenn naturel ha n'he deus netra da welout gant youl an dud. Rak-se e tistaol Lachaga pep mennad politikel, paz eo sklaer a-walc'h ne c'hell ket ur sevenadur padout er-maez eus amlegadoù politikel zo. Da lavarout eo, a-benn ar fin, ned eo ket e savlec'h disheñvel-bras diouzh hini an Aotrou Duparc e Breizh etre an daou vrezel, gant ar Bleun-Brug pe c'hoazh ar Mission Bretonne a zo anezhi bepred e Pariz.

Moarvat ne c'hell ket an emsav ren ur stourm dre an armoù war-zigarez ma n'en deus e ober ur ster nemet e ve e diabell-weled ur bobl vrezhon adsavet evel kumuniezh politikel ; hogen c'hoazh e rank embann dirak an holl n'en deus e ober ur poell bennak nemet e degouezh ar frankiz klok adkavet gant Pobl Vreizh.

Gwir eo ez eo dic'halloud an emsav evit ar poent ; nemet muioc'h dic'halloud c'hoazh eo an iliz e Breizh evit ar mare, war wall ar re a ra van da grediñ daoust da gement a ziskouez ar c'hontrol e c'hell an iliz kroaziañ war he galloud-krouiñ hep mont da get hec'h-unan.

A-benn ar fin ez eo c'hoazh da skrivañ al levr a roio ur ster kristen da emsav ar c'helenelioù e Kornogeuropa. Evel m'emañ avat he

deus oberenn Lachaga an dellid a vezañ lakaet e gwel ur gudenn hag a vez dianzavet gant atebeion an Iliz e Breizh : hini al liamm a zo etre feiz ha stuziadur ; pe c'hoazh, daoust hag ar stuzegezh yoc'hel unvan a zo oc'h aloubiñ evel c'hwenn ar voull-douar en ur zistrujañ an tiegezh hag ar strolloù etre dre ar yoc'hstlenn end-eeun a glot gant an Aviel? Abaoe ar Goursened diwezhañ e soñj an dud a lizeBro-C'hall peerC'hornog dre vras ez eus tu da vadeziñ ar sevenadur arnevez. Evidomp-ni, ur wech ouzhpenn, ne gredomp ket ha rak-se e strivomp da zizarbenn an holl impalaouriezhoù, ha klask a reomp, evit hor c'hont, krouiñ tamm ha tamm ur sevenadur nevez dre ur yezh nevez ; ar yezh-se hepken a c'hell reiñ deomp an tu da derriñ gant un tremened hag un istor a argarzhomp.




NOTENNOU

- (1) An Tad Cardonnel a zo aet da lidañ an oferenn evit an amvevadourion. Disfiz a-walc'h hor befe ouzh mennozioù ha pleustrerezh politikel al leanse a rae dreist-holl betek-henn gant ar fleperezh trivliadel-politikel kleizelour led-varksat a zo diouzh ar c'hiz gant an araogelourion gristen hogen ar gwir a oa gantañ pa lavare e oa awenet diviz eskopti Kemper gant an dispriz dreist-holl. A-hend-all, an oferenn lidet gantañ a zo bet un oferenn reizh, war hon eus klevet.
- (2) Mat e vefe moarvat gwevnaat framm an Iliz pa

ne vefe nemet evit herzel gwelloc'h ouzh galloud ar Stadoù ; elese, ne vefe ket un dra fall, adal ma vefe uhel deskadurezh relijiel ur geduniezh kristen ha gredus he feiz, he defe ar gwir, da vihanañ, da ginnig hec'h-unan an danvez eskibion a zlefe plediñ ganti. Gwell e vefe an hentenn-se eget hini ar breutadegoù hag ar marc'hatadurioù etre ar Stadoù o-unan ha Sez Roma, a zisoc'h e broioù zo - evel en Hungaria pe e broioù komunour all - war anvidigezh eskibion dic'hred ha tost difeiz, nemet deuet mat en abeg da se d'ar penna-durezhioù dizoue.

Ur muzul bennak a 'zirgelroez' a zo ret d'an Iliz er grez-mañ ma fell dezhi dreistvevañ ha trec'h iñ un deiz.

Ouzhpennomp : ar reizhiad urzhazek da envel an eskibion he deus kenlabouret da lakaat e penn an eskoptioù gall renerion digalon pa ne vezont ket difeiz.



DIELLOU DIWAR-BENN ISTOR AN EMSAV

Da gêver hanterkantvet
deiz-ha-bloaz SKOL OBER

Emziviz gant Frañsez Kervella, eus Roazhon

Penaos e voe savet SKOL OBER

E 1931 STROLLAD EMRENER BREIZH a zo o reuziañ ouzh un enkadenn ; enkadenn war dachenn ar gealia-durezh dre ma teu ar gevreadelourion da vezañ kreñvoc'h-keñvañ ennañ, pezh na blije ket da vroadelourion zo ; enkadenn war dachenn an arc'hant ivez, o vezañ ma oa goullo kef ar gazetenn BREIZ ATA0 a oa organ ar Strollad, koulz hag hini an Timoulerzh ma pourchase labour dezhañ dreist-holl.

Ar c'hevredad-kred K.A.B. ("Kevredad evit adsevel Breizh") a oa bet aozet a-drugarez da zonezonou hag aberzhioù ur c'hant bennak a stourmerion vrezhon skoazellet ganto ar gazetenn BREIZ ATA0 en he deroù. Int o doa pourchaset an arc'hant ha roet an tu d'ar gazetenn da zont er-maez e-pad daou vloaz evel kazetenn sizhuniek, - pezh a oa bet ur c'hur e gwirionez ! Ne oa ket mui gouest ar vrogerourion-se diwar neuze avat da zegas muioc'h a

arc'hant.

Ur c'hendalc'h a oa bet bodet e Gwengamp evit klask un diskoulm, met reuz a-walc'h a oa bet ha pep hini a oa aet kuit diouzh e du hep ma vije bet kemeret diviz ebet.

Neuze eo ez arnodas F. Kervella, deuet en-dro da Gemper, a-gevret gant un nebeut mignoned bodet en-dro dezhañ, reiñ lañs d'ur c'hannadig a zlee bezañ un ere etre ar vrogarourion vrezhon ha kemer lec'h ar gazetenn a vanke, - ar pezh a c'hellfemp ober anezhañ hiziv ul Lizher, hag a vo renet gantañ dindan an anv-pluenn 'Kernu', ur berradur eus Kernunnos, an doue keltiek a oa bet dasorc'het er SKETLA SEGOBRANI. En degouezh-se eo e voe roet da F. Kervella, gant F. Debauvais al lezanv "Ki-save-teiñ".

Tennet e veze mil skouerenn eus ar c'hannadig-se a oa e dalbenn "Ur ger... Ur ger all" ha lakaat en doa dezhañ daou bal :

- da gentañ, lemel an dle ;
- d'an eil, reiñ tro da vodañ a-gevret evit prederiañ pennañ stourmerion an emsav evit loc'hañ en-dro gant an ober.

Ne oa ket bet tu da lemel penn-da-benn an dle daoust da vrokusted kevranneion K.A.B. dilezet ganto a-unvouezh o zeulioù-kred d'ar c'hlasker-arc'hant.

Padal e oa atebeion an ti-moulerezh e Landernev o c'hortoz ar gwashañ. Edo ar bank o vont da c'houlenn groñs e vije embannet ar venteliad pa voe galvet Debauvais er pellgomz gant ur vouezh a oa o kemenn dezhañ : "Hiziv emañ e kañv hogen arc'hant am eus ha prest on d'he lakaat en ho kal-loud..." Ar burzhud-se a oa bet sevenet gant Bob a vo anavezet gant ar re gozh.

Bez' e c'helle an ti-moulerezh loc'hañ en-dro ha kerzhout a raio c'hoazh e-pad un nebeut bloavezhioù.

Eil raktres "Ur ger hag...Ur ger all" : bodañ ar stourmerion evit o lakaat da brederiañ a oa bet kavet mat adal an eil niverenn.

Ouzhpenn al lizhiri-kalonekaat e oa bet embannet er gelaouenn evit harpañ ar mennad-se pennadoù savet gant Tassel ('Tugdual') ha daou skolaer yaouank, stourmerion eus an emsav sevenadurel hag a gase war-raok AR FALZ, Kerlann - m'en doa Kervella graet anaoudegezh gantañ gwechall e Lise Brest, - ha Keravel.

Ur wech kemeret an diviz d'en em vodañ e oa ret kavout ivez al lec'h evit ar gejadeg. Neuze 'ta, an Aotrou beleg Saout, ur stourmer kozh eus BREIZ ATAO, unan eus pileroù kevrenn Gemper en amzer ma oa kure e Kerfeunteun, un den dispar e nerzh-kalon - un den dir en ur ger - tremenet gantañ pevar bloaz er fozioù e-pad brezel 1914-18, deuet da vezañ person Sant-Goazeg daoust m'en doa klasket an eskob enebiñ, a ginnigas reiñ bod en e bresbital da izili ar 'c'horr-kendalc'h'-se.

Eno 'ta, e gwasked avalenned Sant-Goazeg, e tlee tremen e-pad tri pe bevar devezh un ugent bennak a stourmerionvrezhon deuet war varc'h-houarn (d'ar c'houlz-hont e oa ar c'harr-tan ur benveg-kehentañ a lorc'h, a oa dreistdiraez d'an dud yaouank). Eno ivez e savas meur a emziviz e-kreiz ar vignoniezh hag an entan.

Debauvais en doa kavet gwell chom hep dont en abeg d'an tabutoù a oa bet un nebeut amzer a-raok. Roparz Hemon ne oa ket deuet kennebeut hogen Lainé ha Mordrel a oa aze, hag ivez, Kerlann ha Keravel.

Etre kendalc'h Gwengamp hag emvod Sant-Goazeg e oa aet e-ebiou un toullad mizioù hag ar c'hudennoù politikel ne oant ket mui ken lemm. Dindan levezon Kerlann ha Keravel e vo pouezet dreist-holl war gudenn ar sevenadur ha disoc'h pouezusañ ha fetisañ ar c'hejadennoù-se a vo krouidigezh SKOL OBER a vo fiziet da gentañ en daou skolaer

nemet a zlee mont en-dro war-lerc'h a-drugarez da vMarc'harid Gourlaouen (1).

SKOL OBER a oa bet diazezet d'ar mare-se enta ha ma n'he deus ket gallet tizhout an holl baliou a oa bet lakaet dezhi he deus c'hoariet memestra ur roll pouezus-kenañ er stourm evit difenn ar yez hag hor sevenadur. Bez' ez eus anezhi c'hoazh hiziv ; kreñvoc'h ha buhezec'h c'hoazh ez eo a-drugarez da emberzh ha dalc'husted an holl re o deus he skoazellet ha kenlabouret enni gant pasianted.

Emziviz dastumet gant
Herve LANNDIERN

Andonioù :

- 1) Emziviz gant Fañsez Kervella ;
- 2) ul lizher digant Marc'harid Gourlaouen deiziadet d'ar 24 a viz Ebrel 1980.

ooo ooo ooo

(1) Kerlann an hini eo a zo bet da gentañ e penn SKOL OBER met sammet gant al labour er deus rapket reiñ e lec'h gant Marc'harid Gourlaouen he deus miret anezhañ betek 1977.

=====

ISTOR HOR C'HENELIOU

Herve LANNDIERN

OKITANIA

Pobl ebet n'eo bet 'diverket' diwar ar gartenn gant kement a aked ha maz eo bet ar bobl okitanat. Kement ha ken bihan ma ne reer anv ebet anezhañ en oberennoù en em ziskouez ar muiañ skiantel ha dibolitikel, ar pezh a lakafe unan da arvariñ diwar-benn onestiz spered hag eounded yezhoniorion zo, Jakobined anezho kent bezañ tud a skiant.

Ya, sellit ouzh an darn-vuiañ eus ar c'hartennoù o tiskouez yezhoù Kornog Europa diazezet er C'hwec'hkogn "unan-ha-dirannadus" ha n'eo ket hepken ar re a zo bet aozet evit bezañ implijet er skolioù... Anzavet e vo evelkent un tammig tachad livet evit ar brezhoneg, ar flamankeg, an alamaneg pe ar c'horsikeg, an euskareg pe ar c'hatalaneg (da vihanañ e vo poentaouet pe garrezennaouet, da vihanañ, an tachadoù merket dezho, ma n'int ket livet!) Mann ebet avat evit yezh Ok, evit Okitaniz - da lavarout eo evit ar 'vaesyehz' pouezusañ er C'hwec'hkogn peogwire kensell daouzek milion a dud hag en em astenn penn-da-benn d'un departamant ha tregont... Nemet setu dres perak e vez harluet ar yezh-se diouzh ar c'hartennoù ! C'hoazh ez eus tu da lonkañ ar c'hwiabuenn gorsikat pe ar wespedenn

vreizhat, goude ma tleje ar re-se flemmañ o tremen dre ar gorzailhenn, met en dro-mañ en em gaver dirak ur gudenn a eilpenn kempouez ha diazez ar Stad kreizennour end-eeun, evel maz eo bet meizet gant empennoù ar vistri o chom e Pariz.

Pouezet em eus amañ war ar yezh peogwir ez eus anezhi merk anatañ ar vroad okitanat hag e tiskouez betek pelec'h en em astenn hag e pelec'h emañ he bevennoù.

Betek pelec'h en em astenn ar vroad-se? E kement lec'h m'he deus betek nevez zo tregernet yezh. Ok, - en tiriadec'hon-se a zo lec'h etre ar mor kreizdouarek, ar Meurvor Atlantel, penn-da-benn d'an Dolzenn Greiz, a-c'haol war an Alpou hag o vont pelloc'h a bep tu d'ar Pireneoù, eus Perpignan da Valensia, dre zouarou Katalounia ma n'eo bet dispartiet he yezh diouzh ar c'hef boutin nemet abaoe an trizekvet kantved, hag hi ur vroad c'hevellez da Okitania, un eil dremm, koulz lavaret, eus ar bed okitanat, o lodañ an hevelep sevenadur.

Bez' ez eo bet Okitania a-viskoazh ur strizhdouar etre daou vor, ul lec'h tremen ha meskañ evit an dud hag ar stuzegezhioù, - etre Su-Europa maz aparchant dezhi hep kuit a dabut, ha Norzh-Europa, maz eo bet levezonet ganti a-hed an amzer, da lavarout eo, a-benn ar fin, ur stern disheñvel-mat diouzh an hini ma voe ganet ha diorret ennañ ar Frankia, ur vroeaz maz eo he hinad doareet rik diouzh kreisteiz Europa, nemet a zo soubet he zreid en Hanternoz dre ar Meurvor Atlantel.

Disheñvel eo ivez ar rannbarzh-se dre an elfennoù oc'h amparañ he foblañs : Iberiz, Liguriz, hag un elfenn ouzhpenn, a zo keltiek nemet n'eo ket ken pouezus, dre vras, hag hini Galia an Hanternoz. Aparchantiñ a ra Okitania enta d'ar bed kreisdouarek m'en devez bet gantañ darempredoù stank abaoe

maz eus bet diazezet ur c'hontva gant ar C'hresianed e Marsilho, hag unan all en Arlez, da vihanañ; ha dreist-holl, kalz abretoc'h e vo levezonet gant ar sevenadur latin war-lerc'h aloubidigezh ha kenurzhiadur Galia Narbonat gant ar Romaned.

D'ar mare ma kouezho Impalaeriezh Roma en he foull ha ma vo aloubet lodenn hanternoz Galia gant ar franked - betek al Liger - (ar re-se, germaned rik ha paganed betek diwezhat a-walc'h, a lezo o siell war ar ranndir-se) e vezo aloubet lodenn greisteiz Galia gant ar Vizigoted, germaned int ivez, nemet arianed a-hend-all, hag erruet eus ar Balkanioù ha Gres, stuziet disheñvel diouzh ar Franked dre ma oant chomet e-pad ur pennad en Italia (kemeret e oa bet Roma ganto).

Ne glaskas ket ar re-mañ distrujañ ar sevenadur latin ; er c'hontrol emaint o vont da zesammañ ar sevenadur-se, hag int o virout al latin evel yezh Stad, hag ivez doare kêrel hec'h ensavadurioù a azono kement an domani okitanat e-skoaz d'ar gevredigezh frankat a vano en he fennañ milourel ha plouezat.

Tra ma tegemero "Frankia" ha Bro-C'hall war he lerc'h "gwir ar C'hustum" a oa diwanet evit un tamm mat diouzh boazioù ar C'hermaned, e viro Okitania ar gwir roman a vo un devouder galloudus a unded hag a vo diazez dezvadurezh ar Vizigoted o-unan ("Dezveg Alaric").

Pezh a ra ar c'hemm pennañ etre Hanternoz ha Su Galia roman a wechall, ouzhpenn an diazez kenel (ar gouennoù kentañ o poblañ ar vro-se), an hinad hag an douarlec'hiadur ez eo donder an intradur latin disheñvel e pep ranndir, brasoc'h kalz er c'hreisteiz eget en hanternoz. Pa vreino al latin e Galia enta ez askoro war div yezh disheñvel ha diforc'h mat : unan anezho, an okitaneg, a viro kalz glanoc'h stummoù al latin ha komzet e vo war-bouez nebeut etre bevennoù rouantelezh

kozh ar Vizigoted (1). O roue, Eurig, en deus dastumet douaroù en-dro da dTolosa, he c'hêrbenn, bet prizet gantañ en abeg d'he lec'hiadur-kreiz.

Moarvat ne bado ket pell ar Stad Vizigotat Okitanat, ha dizale e vezo diskaret gant ar Franked, war-lerc'h o zrec'h e Vouillé, e 507, met d'ar c'houlz-se e vo bet termenet ken don ha ken resis merkoù-diforc'h ar vroad hag ar sevenadur piaouel okitanat ma treuzpadint d'an aloubidigezh ha ma vo gounezef dezho aes a-walc'h he rouaned nevez.

Ken anat eo kement-se m'en devoa soñjet Charlez-Veur en e ratozh kentañ da rannañ an Impalaeriezh, reiñ da Loeiz Akuitania, Septimania, Marz (pe Arlez), Spagn, Provañs ha Burgondia, elese, ar c'hevanad okitanat-katalanat, tra ma chome Frankia unanet gant Germania, ma oa kalz tostoc'h, hag a-bell, dezhi, dre he stuzegezh hag he frammadurioù, ma neoa ket dre ar yezh.

Pa vo bet aozet avat feuremglev Gwerzin e 843 e vo sevenet ar rannadur-se war un diazez diforc'h a-grenn ha diboell a-walc'h e gwirionez. Ar wech-se ne oa ket didroc'het an Impalaeriezh hervez ul linenn a-led met hervez bandennoù a-sonn, hep derc'hel kont ebet eus diseurtiezh ar poblañsoù.

Evel-se e vo krouet gwengel ar "Francia Occidentalis" a vo un nor-zigor d'an impalaouriezh karolingat, ha goude-se d'ar skrafer kapetat ha d'e warlerc'hidi, o pourchas dezho un digarez d'en em deurel war-du ar Mor Kreizdouarek, ar pezh a vo argollus bras evit ar vroad okitanat, daoustma n'en devo kement-se, da gentañ, efed ebet war diorreadur ar sevenadur okitanat. Daou c'hantved war-lerc'h avat e vo sklaer gwallefedoù ar rannadur termenet gant Charlez-Veur. Er c'hreisteiz ez eus bet savet div Stad c'halloudus, okitanat dre o yezh hag o sevenadur : en Akuitania-Veur, Kontelezh Tolosa, dalc'het gant Tilu Sant-Jili, hag a bep tu d'ar Pireneoù, ur c'hevanad katalanat-

araogonat-provañsat unanet dindan ar bez-roue Alfoñs II.

"Tri zilu a zo o kevezañ, dezho an hevelep galvedigezh da zastum en-dro dezho douaroù ma komzer enno ur yezh romanek nevez-flamm, ar yezh romanek kentañ, war-lerc'h al latin, o c'hounit dellid ur yezh lennek, m'emañ enno ivez un tudad nevez oc'h emouezañ ouzh e hevelebiezh..."

Diwar neuze e c'hoarvezo istor Okitania eus kenstourm an amrizh Stadoù-se ha na zeuont ket abenn d'en em unaniñ en ur vroad hepken a-enep da impalaouriezh Kapetiz.

Dre ma n'he deus ket kavet Okitania hec'h unded en-dro war-lerc'h diskar ar Stad Vizigotat eo o deus istorourion ar C'hwec'hkogn klasket nac'hañ hanvoud ar vroad-se zoken ha mesket an traoù en un doare ampart, ken e par ar yezh, ken e par ar politikerezh.

Ganto e vez anv eus Akuitania, Gwaskonia, Arvern, Provañs ha 'Yezhokva', hag eus kement-all a rannyezhoù, ken e teu diâs d'al lenner etre ha na oar ket eus petra ez eus anv, kavout e hent er geunioù-se e-lec'h e klasker sankañ anezhañ, ha sevel dreist d'ar rannvroelouriezh.

Ha padal n'eo ket disheñvel-bras saviad Okitania d'ar c'houlz-se diouzh hini Alamagn hag Italia a oa rannet evit un tamm mat d'an hevelep pred, a oa sujet ivez da c'halloudoù estren, anezho koulskoude ranndirioù ha na glasker ket nac'h ez oant broadoù.

Ha war un dro eo er c'hantvedoù-se, pa ne oa stad okitanat unvan ebet, en deus sevenadur Okitania lugernet ar splannañ dre e yezh, hini an Droubadoured ; d'ar c'houlz-se eo he deus ar yezh-se kaset he bannoù ar pellañ, ez eo bet ur yezh a lennegezh evit Italia an Hanternoz, da nebeutañ betek amzer Dante, hini Alamagn ar Roen, hini Lez

Poatie, o c'hortoz ma vo graet anezhi hini Lunden Alienor.

Tra ma chome ar galleg rannet e parladoù diforc'h a-walc'h : normaneg, frankeg, pikardeg, walloneg, champagneg, poateveg... e tiskouez yezh Ok, en e stumm lennegel da vihanañ, bezañ unvanmeurbet, daoust ma ne oa er rann-diroù okitanat amaezhiezh boutin ebet.

Gant ar razh kapetat, na c'heller ket skuizhañ, e vo krignet a nebeudoù an egor okitanat ; aloubet e vo Arvern e 1189, aloubet kreiz Okitania (etre Avignon ha Toloza) etre 1209 ha 1213 war zigarez ur groaziadeg a-enep da Albigiz, a yelo e devoud d'ur brezel-diouennañ a-enep da gristenion all tra maz aio an torradur etre Norzh-Okitania ha Katalania war ledanaat.

Akuitania he deus staget he flanedenn ouzh hini Vro-Saoz, a-drugarez da eured Alienor, ha mirout a ra ar pep brasañ eus he frankiz hag he stuzegezh piaouel betek fin ar brezel kantvloaz : ul lu gwaskoniat - ha n'eo ket unan saoz, evel ma lavar an dornlevrioù istor implijet er skolioù gall, - eo a zo faezhet e 1453 e Castillon !

Stagidigezh Navarra ouzh Bro-C'hall gant Herri IV e 1593 ha, neuze, hini Nisa e 1860, a lakaio da gouezhañ an tiriadoù okitanat diwezhañ e domani ar Stad c'hall.

Padal e oa bet boulc'het mat dija neuze ar stourm a-enep da yezh ha da sevenadur Okitania gant ar rouaned kapetat, kalz abretoc'h zoken eget odrenañs brudet Villers-Cotteret embannet gant Frañsez Kentañ e 1539 hag a zioget d'ar galleg ar renk kentañ er broioù aloubet ; ar stourm-se a zeuio da vezañ taeroc'h ha reizhiadek adal an Dispac'h gall ha, peurgent, dindan an Trede Republik.

Pobl arallekaet, skrapet diganti he frankiz hag he sevenadur, he deus Okitania gouzañvet diwar un namm don hag a zo hemañ : n'he deus bet biskoazh

Stad Voutin ebet m'en dije gellet ar c'houn anezhi reiñ ur skeudenn fetis eus ar Vroad, o vezañ ma oa bet berrbad-tre ar Stad vizigotat kentañ. Setu penaos e c'heller diskleriañ, hep mar, perak ez eo bet ken tenn da Okitaniz en amzer vremañ emouezañ ouzh o dibarelezh evito da amparañ maeskenel pouezusañ Europa ar C'hornog dre he zolz ha dre lufre he sevenadur gwechall.

P'he deus Okitania enebet ouzh Pariz er c'hantvedoù diwezhañ e reas o wiskañ bepred ur maskl bennak, hini ar relijion (protestantiezh a-enep da gatoligiezh kefridiel ar Stad c'hall) pe hini ar politikerezh diabarzh (republikanouriezh, rouelouriezh pe radikalouriezh a-gleiz) ha n'eo nemet en hon deizioù he deus adkavet an hent m'he doa kollet ar gwel anezhañ, an hent a gas en-dro da vammenn hec'h hevelebiezh wirion hag a ray dezhi tizhout hec'h unded ; ar yezh eo enta kentoc'h eget koun un istor muioc'h diechu ha diglok eget hini Breizh a roio an tu da Okitaniz adkavout skiant o broadelezh ; 'yezh' en Okitania a zo kenter gant 'broad' ; ar yezh eo a zo bet simant an unded okitanat dreist d'an harzoù ha d'al liesseurtiezhoù, - un unded hag a zo retoc'h eget biskoazh en hon amzer evit trec'hiñ enebourion ar vroadelezh hag adskoulmañ gant ur blanedenn a zo dezhi merk ar frankiz.

Herve LANNDIERN

.....

DA DIVANKAÑ er pennad "Tavarn an Triskell", niverenn 133, miz Genver 1981, p. 37 :

Digant hor c'henlabourer Herve Lanndiern :

"Per Denez a gemenn din em eus graet ur fazi. N'eo ket e straed Edith Cavell edo Tavarn an Triskell, met e straed Jean-Jaurès, da lavarout eo, an hini a ya eus Straed Edith Cavell d'ar C'hae. Disofjet em boa kustum Roazhoniz da droc'hañ o straedoù evel buzhug ha da reiñ un anv disheñvel da bep tamm anezho.

P. 36, er pennad Rozennig Lesawez. En adnotenn kentañ, eizhvet linenn, ret eo lenn : "Harzet e oa bet dre na oa ket bet kavet e vab..." (ha n'eo ket : "dre ma oa bet..." Ar c'hontrol an hini eo."

=====

E sigur marv an Aotroù Yann-vari Perrot

Anv a zo eus Yann-Vari Perrot meur a wech en niverenn-mañ. Pezh a ouzer diwar-benn an drouklazh sevenet a-enep dezhañ eo e voe gourc'hemennet gant ur gwazerezh gall eus Lunden, evel hini Brikler un nebeut mizioù kent, ha moarvat gant an hevelep tud ha war an hevelep arbenn : broudargadiñ an emsaverion evit o lakaat da sevel a-du krenn gant an Alamaned, ur ratozh a reas berzh evit darn, a-benn gellout diskar aesoc'h an emsav goude ar brezel. Ar pezh a zo iskis avat eo ne voe ket graet brud en-dro d'an afer-se er skingomz gall e Lunden, a gav deomp, tra m'he doa muntridigezh Brikler pourchaset danvez ur brezegenn da vM. Schuman. Gouezet e vo un deiz piv a zo bet kiriek d'ar muntr awenet hepken gant ar gasoni ouzh Breizh hag an emsav e gwirionez, evel an hini kentañ a-hend-all. Hogos daou-ugent vloaz a zo tremenet abaoe an darvoud hag aesoc'h e vo diwar vremañ teurel sklerijenn war darvoudoù zo eus istor an emsav. Notomp diwar dremen ez eo bet kredet e gaou gant an emsaverion e-pad pell amzer e oa bet divizet ha sevenet an muntr gant komunourion eus ar c'horn, pezh a oa ur fazi.

JIL EWAN

BREZHONEG-STUDI

GANT PETRA EO GRAET
FROUEZH AR C'HEDUNADUR

Kroget em boa va rummad skridoù war an Hegaristiezh gant displegañ, e korf ur pennad kentañ talbennet 'Debrifñ kreud ar C'hrist hag evañ E wad' (1) petra oa "ar brasañ burzhud a zo da lakaat war gont karantez Doue evidomp, an dud". Gant un eil studienn, dindan an talbenn "Ober ur pred gwirion eo keduniñ ouzh Kreud ha Gwad ar C'hrist" (2), e tisplegen e peseurt stumm e ro dimp Hon Salver buhez dendouevel e greud hag e wad, eleze diwarbouez tregemmadur argreskus ha distroñs hon buhez en e hini, dre gedunadennoù lerc'hadek*, evel da geñver ar predoù a renevezomp ouzh taol. O vezañ ma ne fell ket d'Hon Salver e vefe disheñvel doare hon c'hreskidigezh speredel diouzh hini hon c'hreskidigezh korfel, o vezañ ma fell dezhañ, e penn kont, kas da benn bep un nebeud santelidigezh ar gristenion, e venegen evit ar wech kentañ an droienn 'gras-santelaat', oc'h ober dave ivez d'hon santelidigezh argreskus dre an Hegaristiezh. Lavarout 'tregemmadur argreskus hon buhez e buhez an Arloz', kedunadenn goude kedunadenn, paz eo be-

pred an hevelep beziadelezh*, eleze hon doueveladur*, - hogen diwar-bouez div droienn disheñvel, - eo a gavomp o vont d'ober devoudad* ar c'hedunadur hegaristiel. Ne oa ket sklaer betek-henn avat keal seurt gras, anvet c'hoazh 'gras-yonaat'* pe neuze 'gras piaouedel'. Ha setu perak em eus kinniget etretalud ur pennad all d'al lennerion dindan an talbenn 'Emmanuel'(3), evit plaenaat hennad* ha gwikefre ar c'hras-yonaat en Arboelladurezh hon Silvidigezh, rak e stern ar c'hras-yonaat eo e vez tregemmet hon buhez e buhez ar C'Hrist.

&&& &&& &&&

Ha bremañ e rankan pouezañ adarre war graf ar c'hras-yonaat, o vezañ maz eo ar greskidigezh anezhi, evel hini ar briwerc'hioù dreistnaturel ha hini roziou ar Spered Glan frouezh pennañ nep kedunadenn graet gant pep terkoniad* vastus. Hogen frouezh all c'hoazh, evel ma welimp pelloc'h, e vez Kerrin an Aoter o tegas ivez d'ar gristenion da geñver pep kedunadenn graet e karantez Doue hag an dud.

Kreskidigezh ar c'hras-yonaat

Gant va fennadoù diagent em eus displeget endeo petra oa ar c'hras-yonaat. Mard eo 'had Doue' evel ma lavar dimp Sant Yann (1añ Lizher, 3/9), emañ en he c'herz, anat eo, ober dimp perzhiañ e hennad* hag e buhez Doue : ya, dont da vezañ ganti, neket Doue, evel dres, hogen advibion dezhañ ha, diwar eno, perzhidi en e hêrezh, en e glod hag e wenvidigezh tragouezel* da zont. Kantvezomp ivez, diwar vont, ar pouez a ro an Hegaristiezh d'an advaberezh douevel dre Jezuz, ar Mab tragouezel nemetañ o vezañ maz eo, dres a-walc'h, e buhez ar Mab tragouezel nemetañ eo e vez tregemmet bep an nebeud

hon buhez dimp evel m'hon eus gwelet a-raok, rak evit ma vefemp santel, diwar skouer ar Mab tragouezel nemetañ eo ez eo bet roet dimp ar c'hras-santelaat.

Mard eomp bemdez enta da geduniñ, ha bastus pep terkoniad ganimp, ne c'hall seurt perzhiadur nemet mont war vrasaat. E reizh hon advaberezh d'un Doue, addeuet da vezañ dimp un Tad Gwirion dre berzh daspren Jezuz war e Groaz, ne c'hall an Hegaristiezh, degemeret ganimp evel ur magadur, pred goude pred, nemet kreskiñ en hon c'hreiz an asez 'Had Doue' maz eo ar c'hras-yonaat, houmañ, e-giz ur piaoued, oc'h intrañ elfenn speredel hon hinideniezh*, evel ma treant an tan an houarn ruz. Dre hennad emañ trec'h Kerrin an Aoter d'ar re all rak tennañ a ra, deiz goude deiz, d'adeiladiñ ha da greskiñ klod hon buhez tragouezel e kerc'henn an Dreinded. Gwelet hon eus penaos e vez ar vadeziant o tevoudañ ar c'hras-yonaat hag an Ademglev ouzh hec'h azdevoudañ. Gwelet ivez moarvat penaos e vez ar Gouzoumenn o tegas dezhi kreskadur, rak ne c'hall kefleuniadur ebet c'hoarvezout e par roziou ar Spered Glan, pal ar c'herrin-mañ, nemet ha diwar-bouez kresk ar c'hras-yonaat e ve. Ur bennaenn sonn eo houmañ war dachenn ar feizoniezh kristen. Hogen askoridikaer* gwirion ar c'hras-yonaat eo Kerrin an Aoter nemetañ, dres dre berzh an doare unvaniezh hep he far bet meneget endeo hag a c'hoarvez kellies gwech ha ma keduner hep pec'hed grevus.

O vezañ maz eus anezhañ ivez muiget forzh pe gerrin-all derc'hennadur* bev Aberzh ar Groaz ma tever dioutañ kement gras a zo, emañ Kerrin an Aoter o tevoudañ en hon c'hreiz, gouez da Sant Tomaz Akuino, frouezhennoù pouezusoc'h eget reoù an holl gerrinoù all. Gantañ emañ dreistfonn ar grasoù hep o far, dre m'emañ en e gefridi peurseveniñ devoudad ar c'herrinoù all, war-bouez degas

d'e gefleunded al labour bet boulc'het gant pep hini anezho diouzh e du, sev unvaniñ ar strishañ ar gwellañ pep kristen gant Jezuz Krist e Salver.

Kresk ar briwerc'hioù douedaveel*

War un dro gant kresk ar c'hras-yonaat e tegas ivez ivez ar c'hedunadur en hon c'hreiz, hag e kenfeur gantañ, kresk ar briwerc'hioù douedaveel: Feiz, Goanag ha Karitez.

Hogen ar Garitez, dreist pep tra, a vez levezonet gant ar c'hedunadur rak evel ma lavar Sant Tomaz Akuino : "An Hegaristiezh eo Kerrin ar Garitez, ar c'herrin a vez ouzh he derc'hennañ hag he diorren..." (3a Pars, 18 a3 ad 6). Ac'hano e teu ma kresk hon c'harantez evit Doue hag an dud hervez ma kresk ivez ar c'hras-yonaat en hon askre. hag evel ma n'eus araez* all ebet a ve gwerc'hek-oc'h* eget Kerrin an Aoter evit ober d'ar c'hras-yonaat kreskiñ ennomp, n'eus araez all ebet gwelloc'h kennebeut evit diorren ennomp seurt karantez douevel hag he gorren betek en he barr.

Kresk ar briwerc'hioù diazezel

Niverus eo ar briwerc'hioù dreistnaturel, nemet e c'hallont holl bezañ direet* d'ar pevar briwerc'h diazezel : Arboellegezh*, Reizhded, Nerzh ha Gofvoregezh*, evel ma 'm eus graet meneganezho em pennadoù diaraok. Diazezel e vezont anvet, peogwir e talvont da ziazez d'ar re all. Enskuilhet e vezont gant Doue e pep den gant ar yonidigezh* da gefiver ar Vadeziant.

Evel m'emañ ar ger o verkañ, e vez ar briwerc'hioù douedaveel oc'h ober dave kentizhel* da Zoue, pezh na ra ket ar briwerc'hioù diazezel. Ha koulskoude, hervez ar feizoniourion, e vezont o perzhiañ e buhez Doue war-bouez danzen hon spered

d'ar Gwel Gwenvidik. Ouzhpenn ma teuont en diwezh da vezañ ken hañval ouzh ar briwerc'hioù douedaveel, ma vezont evel intret ganto evit bezañ direet e penn kont d'ar Garitez nemeti. Ha diouzh ma kresk ar c'hras-yonaat e vezont ivez o kreskiñ.

Kresk rozioù ar Spered Glan

Ne spir ket ar briwerc'hioù koulskoude da ren oberoù silvidik, hag alies e rankont bezañ skoazellet gant ar Spered Glan. Anez dezho avat kaout ivez en o c'hreiz gouestedoù da sentifi ouzh lusk ar Spered-Santel ne c'halljent ket akuitañ ganti nemeur. Setu perak e vez bastet seurt gouestedoù da bep ene kristen gant ar Vadeziant. Anvet e vezont : Doujañs, Nerzh, Deoliezh, Emgelenn*, Skiant, Meizegezh ha Furnez. Seul vui e kreskont ha seul vrasoc'h emichañs e vez o berzhusted*. Hogen, peogwir e kreskont evel ar briwerc'hioù war un dro gant ar c'hras-yonaat, seul gresketoc'h e teu houmañ da vezañ, diwar-bouez ar c'hedunadur arreet* ha menec'h*, seul vrasoc'h e teu ivez o nerzh da vezañ. Ma c'haller lavarout e tennont, diouzh ma kreskont, da varrekaat ar c'hristen war an iolezh* - eleze war ar bedenn gantaezouezel* ha da vale fonnus war hent ar santelezh. Hevelep gouestedoù roet gant Spered Doue, dimp da vont dalc'hmat diouzh e vroud silvidik, e vez graet anezho Rozioù ar Spered-Glan.

Frouezh all a bep seurt

Gant Kerrin an Aoter e teu dimp frouezh all a bep seurt. Soñjomp ervat da gantañ e vezomp dre berzh ar c'hedunadur o kejañ gant Kreud, kalon, spered ha dreist-holl douevelezh an Hini a vez anvet ganimp Hon Salver Jezuz-Krist. Hevelep madoù avat e vez stag ouzh pep unan anezho ur c'hras di-

seurt.

Korf dinamm Jezuz emañ stag outañ ur c'hras graet evit santelaat hon c'horf, dezhañ da sentiñ seul aesoc'h a se ouzh darvennadoù* hon spered.

E wad uhelbriz emañ stag outañ ur c'hras-digoll ha -daspreañ graet evit kadarnaat ennomp goanag hon silvidigezh ha magañ en hon c'hreiz pep kaloned ha pep kendalc'hegezh war dachenn hon emgann speredel.

E galon santel emañ stag outi gras an deneridigezh hag ar gouvrantiezh, da bep keduner deol da gantaezañ ha d'arnodiñ pegen c'hwek e vez yev un Tiern evel Hennezh !

E spered emañ stag outañ ur c'hras-sklerijenniñ - dimp da veizañ gwelloc'h ar gwirionezioù tragouezel ha da ren hon c'hammedoù e pep diogelled war hentoù teñval ar Feiz.

Duevelezh nevet an Arloz en diwezh, emañ stag outi ar Gantaezouezelezh* hag ar Goursav, unan graet moarvat evit sebezif speredoù evurusañ luoz an Aelez.

Gouez da Sant Gregor, karantez Doue ne chom ket aroarek* ha pa grog en ur galon bennak e vez broudet houmañ ganti d'ober moliac'hoù.

Setu perak e vo tu dimp adarre da welout, gant studiennoù all a fell din sevel diwezhatoc'h, perak e vefe arabat dimp digalonekaat pa vanomp evel estren ha yen ouzh ar c'herrin. Rak, gant ar c'hedunadur, e vez ennomp ar Spered Glan, eleze Spered Treindedel ar C'hrist, neket hepken o pediñ en hon lec'h, hogen o karout en hon lec'h ivez. Kement ha ken bihan ma ne c'hall mui neuze nag ar pec'hed nag an dianlenadoù* anezhañ, zoken marvel, chom da genvevañ gantañ, adal m'En degemeromp diwarbouez ar c'hedunadur. Nann, karantez Doue n'eo ket unan aroarek an hini eo !

JIL EWAN

+++ +++ +++

Prezegenn distaget gant KLERG
da geñver deiz-ha-bloaz
marv an Aotrou Perrot,
Lun Fask, Koad-Kev, 1981

Mignoned ker,

An devezh-mañ evidomp-ni, bodet amañ e-kichen bez an Tad Yann-Vari Perrot, hag e-tal chapel Koad-Kev adsavet gantañ, a zo un devezh-eñvoriñ hag un devezh-pediñ. Ar re a wel en hon emvod ne ouzon peseurt mennad makia-velek a ra ur pezh mell fazi.

Deuet omp evel Bretoned, evel kristenien, evel tud hag o deus soñj eus an devezh tristese : an 12 a viz Kerzu 1943, ma voe diskaret war an hent, gant un tenn en e benn, an Aotrou Yann-Vari Perrot, person Skrignag, d'an oad a 66 vloaz.

*** **

En ur vro evel houmañ hag a zo brudet evit he devosion d'an Anaon, n'eus den ebet a gement en defe ar gwir da virout ouzhimp da sevel hor spered hag hor c'halon etrezek an hini a reas e Hent ar Groaz, dre bep seurt trubuilhoù, evel Breizhad, evel Beleg, evel Pastor, betek an daouzekvet taolenn, betek e varv, ha betek ar bevarzekvet, da lavarout eo, betek amañ e-lec'h m'emañ e gorf o repoziñ.

N'eus den ebet, a lavar an, a gement en defe ar gwir da virout ouzhimp d'en em vodañ amañ

pa ne reomp na trouz na dizurzh na reveulzi.

*** **

An degouezhioù ma voe lakaet an Tad Perrot d'ar marv, an abegoù hag a reas da dud 'zo goprañ un drouklazher n'int bet biskoazh disklariet. Ezhomm a vefe bet ur prosez graet, hervez ar justis met ar ger-se: prosez hervez ar justis, a laka tud 'zo da spontañ ha darn all da skrignat o dent. Setu perak eo bet hag e vo, evel ma vez lavaret, interet an afer-se... hag e c'hello ar bilpouzed bezañ didrubuilh...

Ur gentel all, ez omp-ni deuet da glevout - kentel ar garantez. Rak kaer eo lavarout ez eo bet drouklazhet an Aotrou Perrot en abeg d'e garantez : roet en deus e vuhez dre garantez evel ma roas e vuhez Eskob Salvador warlene ; gouzañvet en deus poan en e gorf, en e galon, en e spered, dre garantez : e gleñvedoù, gant e wazhied-gros, al labour en ur barrez ken diaes, ken yen, ken frank, evel ma lavare Sant Paol ; ar preder hag ar soursi gant an holl dud fiziet ennañ. Lavaret eo bet ne oa ket gwelloc'h eget ar veleion all, pastored hag o deus poaniet ivez da brezeg an Aviel ha da lakaat anaout ha karout Hor Salver. N'eo ket un enor dister dija, lakaomp, evit an Aotrou Perrot, bezañ lakaet e renk ar veleion vat all. Met ar veleion vat all a zo marvet en o gwele, hag an Tad Perrot diskaret evel ur c'hi war an hent.

*** **

Ne ouzon ket hag-eñ ho poa taolet evezh ouzh fin an Aviel bet lennet e-kerz ofis Sul ar Bleunioù, disul diwezhañ (Aviel-Sant-Vazhev).

Permetet en devoa Pilat da Yozef a Arimazea diskenn Korf Jezuz diouzh ar Groaz, hag emañ ar gwraez santel - evel ma oar hen ober merc'hed mat - o lienañ ar C'horf marv a-raok hen lakaat er bez.

E-pad ar c'heit-se ez eus kuzuliadeg gant pennoù bras ar Yuzevien, hag en em glevout a reont neuze evit mont da gaout ar Gouarnour Pilat ; un diviz bennak evel-hen a vo neuze etrezo hag ar Gouarnour.

- Aotrou Gouarnour ! Klevet a-walc'h hoc'h eus en devoa an Toueller tud-se," (diwar-benn Jezuz en e komzont, eveljust,) "lavaret ec'h addeuje bev d'an trede deiz goude e varv... Barrek eo e ziskibien da zont da laerezh e gorf ha da embann da c'houde ez eo savet a varv da vev. Ha gwashoc'h e vefe en taol-mañ an douelladenn eget en taol kentañ. Grit eta lakaat un difenn asur war ar bez.

- Mat eo," eme Bilat, "soudarded ho po. Kemerit-i, ha lakait eta, e-giz ma ouzoc'h hen ober, un difenn asur war ar bez."

Goût a ouzomp ne dalvezas ket kalz a dra an difenn asur-se war bez Jezuz !

Ne c'hell ket Jezuz bezañ klozet en ur bez, zoken gant ur maen bras ha ponner ruilhet war genoù ar bez.

*** **

Me 'gav din e talvez ar gentel-se ivez evit pezh a sell ouzh an hini ez omp deuet da enoriñ hiziv ha da bediñ evit renoz e ene : an Tad Perrot.

Piv a zo gouest da glozañ ar vrud anezhañ er bez-se toullet e skeud chapel Koad-Kev ?

Piv a zo gouest da vougañ e spered hag e gentelioù ?

Piv a zo gouest da lavarout : bet on trec'h dezhañ ha serret em eus genoù ar re a felle dezho derc'hel ar soñj anezhañ.?

Piv a zo gouest da raskañ ar bajenn-se eus Istor Breizh 'lec'h ma konter buhez, labour, skouerioù, kentelioù ha marv an tad Perrot ?

*** **

Eo ! Bez' 'z eus tud hag a zo gouest : Ni an hini eo ! Ya! Mar bezomp digalon a-walc'h evit hen ankouazh. Eo ! Mar bezomp aonik a-walc'h da chom hep dont da stouiñ dirak e vez ha da bediñ, ha ma' ankouaomp an uhelvennad a voe e hini :

Feiz ha Breizh

Spi hon eus ! Un deiz a zeuio ma teredo Pobl Vreizh gant an dud-a-iliz en o fenn ha pennadurezhioù ar vro etrezek Koad-Kev, evel etrezek ur stivell, un eienenn a yaouankiz, da zeskiñ penaos kas Breizh war hentoù ar justis, al labour, ar peoc'h hag an enor.

War a leverer, deiz Pardon Koad-Kev, deiz-gouel ar Werc'hez Hanter-Eost, en amzer an Tad Perrot, e veze klevet an turzhunelled o kanañ amañ er gwez en-dro d'ar chapel...

Un deiz bennak e vo klevet c'hoazh an turzhunelled o kanañ, pa savo an nevez-amzer war hor bro Vreizh, mestrez war he flanedenn, hec'h-unan...

Deuet e vo da wir hon huñvreoù, hag huñvre an Aotroù Perrot.

KLERG

XXX XXX XXX

BURUTELLEREZH

KERWERC'HEZ (Yann-Vari).- En ur rambreal.- Brest, Al Liamm, 1980.- In-8°.

Hag eñ Breizhuhelad, Yann-Vari Kerwerc'hez (war rolloù ar staderezh : 'Jean-Marie Guerchet) ne oa ket brezhoneger a-vihanik. Ganet e oa e Naoned an 3 a viz Kerzu 1910, eus un tiegezh a denn e orin eus Prenter ('Pringuiou') hag eus Pornig el Liger-Atlantel.

Graet en doa e studioù e Skol-veur ar c'henwerzh en Naoned ha bez' e oa anezhañ e dibenn ar brezel diwezhañ, rener an ezporzhiadurioù e ti Rhône-Poulenc e Pariz. Er gelaouenn SAV, diazezet e Pariz, eo ez embannas e skridoù kentañ e brezhoneg, ur yezh bet desket ha bet perc'hennet gantañ ervat, dindan an anv-pluenn Y. Mab-Koig, Coic o vezañ anv e vamm. War a seblant ez eo bet dedennet en un doare dibar gant broioù an hanternoz: Suomi, Norge h.a.

Etre 1936 ha 1938 ez embannas Istor Norge e-barzh SAV, hag ivez ur gontadenn iskis : "Ha petra 'oa ? ..." e 1938, ma tremen an darvoudoù anezhañ e Suomi. Er gontadenn-se en em ziskouez e ampartiz skrivagner. En "Heure Bretonne" ivez e voulo "Abadenn Nansos" a zo un danevell eus dilestradeg ar c'herc'hvezen* gall-saoz e Norge. Ar wech-se e oa bet kaset di gant an Tonkadur ha n'eo ket gant an nested-spered pe an huñvre. Roet en deus diwarbenn "Abadenn Nansos" un testeni buhezek ha gwirion hag a oa disheñvel a-walc'h, eveljust, diouzh ar ar rentaoù-kont kefridiel a voe embannet a-zivout

ar vrezekadenn-se.

Merkañ a c'heller ivez ez eo unan eus penntudennoù e romant bras "En ur rambreal", Dagny Heatherbrook Norgeadez dre he mamm.

Eus ti-embann SKRIDOU BREIZH, e 1943, ar c'hentañ romant polis bet skrivet biskoazh en hor yezh, a vo kurunennet ivez gant Kevrenn al Lennegezh eus "Framm Keltiek Breizh". Diviet e oa abaoe pellzo ha ne oa tu ebet d'e gaout e neb lec'h. Dianav e oa ivez d'ar rummadoù yaouank. Gwell a se emañ o paouez bezañ bet advoulet gant AL LIAMM, dindan un doare nevez krenn, dezhañ ur golo isvouk a zo dleet ur wech ouzhpenn da ampartiz Tudual Huon.

"En ur rambreal" n'eo ket hepken un 'detective story' eus 247 pajenn, eus ar c'hentañ ha dedennus-tre ; bez' ez eo ivez un oberenn leun a faltazi, a vousfent hag a zudi, - un doare komedienn dre sonerezh e-lec'h en deus postet an aozer kalz eus e bersonelezh, eus e zougou, eus e huñvreoù, eus e c'hoanagoù. Evel e-barzh "An aotrou Bimbochet e Breizh" - maz eo nes an oberenn-mañ dezhañ e meur a geñver, e tremen an darvoudoù anezhi en ur Vreizh deuet da vezañ en-dro hi hec'h-unan, ur 'Vreizh-Uhel adkeltiekaet penn-da-benn penn-da-benn' ha n'eo mui 'chase miret' an estren, troc'het eus ar bed, troc'het eus ar bed met digor-bras d'avelioù an donvor, e-lec'h e tremen-distremen ar veajourion evel en amzer hor c'hantvedoù aour, ur Vreizh evurus ha balc'h, laouen o vevañ ; er Vreizh-se en deus ar skrivagner bourret o kantren, pell diouzh strizhderioù ur vicher divarzhoniezh, pell diouzh retvezhioù ar pemdez hag an harlu, dindan tresoù ar penntudenn, Yun Pulluc'h, un doare sonour bale-bro, ur foeter-hent eus bed ar C'hornog, stummet mat diouzh plijout da Vrezhoned yaouank a hiziv.

Herve LANNDIERN

&&&& &&&& &&&&

&&&& &&&& &&&&

Alfred FABRE-LUCE.- Daou dorfed en Aljer. Paris, Julliard, 1979.- In-8°.

En un doare souezhus ez eo alies ar prantadoù an tostañ ouzhimp, ar re hon eus bevet enno, ar re a anavezomp an nebeutañ, ha ni touellet mui pe vui gant bruderezhioù a bep seurt, o vezañ ma chom an oberourion, ar re a sach war ar c'herdin evit lakaat ar margodennoù da fichañ war leurenn ar c'hoariva, a-dreñv ar c'hinkladur, ha n'eo nemet pell amzer goude e ouzomp piv 'oa mistri an abadenn.

Diskuliadennoù Soljenitsin hag un nebeut re all, embannidigezh dielloù Bro-Saoz hag ar Stadoù-Unanet a grog da ziskouez darvoudoù ar brezel diwezhañ dindan ur stumm disheñvel-krenn diouzh an hini kefridiel ha skridoù un istorour onest ha kalonek, stlennet mat ivez, evel Fabre-Luce, a labour war an tu-se hag a ro deomp an tu da ver-zout spisoc'h, evit brasañ damant un nebeut idollennoù eveljust.

Levr diwezhañ ar skrivagner enta : Daou dorfed en Aljer ez eus ennañ daou bennad : Lazhidigezh Darlan hag Afer ar Bazouka o defe purchaset danvez dazaou romant spierezh gant un nebeut kela-noù en dibenn anezho, nemet, siwazh, klotañ a ra an istor-se gant ur gwirvoud reuziek ha n'eo ket gant ur faltaziadenn bennak. Daou afer a zo disheñvel-bras d'ar c'hentañ sell, hag a zo nes-tre an eil ouzh egile koulskoude !

Pebezh makiavelerezh ! Pebezh ampartiz hep he far ! Amañ e kejomp hogozik gant un torfed 'disi' nemet na vez ket 'erounezet' gant ar re o deus empennet anezhañ.

Gouzout a reomp a-drugarez da Robert Aron - en e Istor an Dieubidigezh, gant piv e oa bet pell-urzhiet drouklazh an Aotrou Perrot hervez ur steuenn heñvel da sabatuiñ ouzh hini an torfedoù-

mañ ez eus anv anezho el levr ; ne vanke nemet un nebeut munudoù evit kompren ervat. Souezhusat tra! O c'havout a reer en titouroù a zo deuet nevez zo deomp diwar-benn muntr an Aotrou Perrot hag a ro deomp diwezhañ pezhioù al luziatez.

12vet a viz Gouere 1980

Herve LANNDIERN

Joseph CHARDRONNET.- Rennes et la Haute-Bretagne.- Paris, Editions France-Empire (1980).- In-8°, 408p., sk., pl.

Savet eo bet al levr-mañ gant unan a genlabourerion ar gelaouenn, a zo ivez ur skrivagner brezhonek, hag a zo brudet evit bezañ embannet endeo un 'Istor Breizh' hag un oberenn all gouestlet da Sent Vreizh, deuet er-maez e-giz ul levr cheurc'h-kenañ bremañ ez eus tri bloaz bennak - a gav deomp.

Un embannadenn kaer-meurbet eo houmañ ivez, enni skeudennoù e-leizh, taolennoù emaez-skrid, h.a. Evit darn ez eo an oberenn-mañ un Istor Breizh gwelet diouzh Gorre ar Vro, klok a-walc'h avat, o vezañ maz eo bet kreizennet en-dro da Roazhon ar pep brasañ eus Istor Breizh, da vihanañ e-pad kantvedoù diwezhañ an dishualded hag en amzer an emvelestrerezh ; kêrbenn ar vro e oa Roazhon ; eno edo lez an Dug ha, diwezhatoc'h, ar Breudoù. Setu, ul lec'h a ziforc'h a zo roet da Roazhon el levr hogen kêrioù all Breizh-Uhel, Redon ha Sant-Malo, da skouer, n'intkêr ankounac'haet evit-se.

Kas a ra J. Chardronnet e zanevell betek an amzer vremañ. Kavout a ra an tu da gomz eus an Em-sav ha dreist-holl eus brogarourion zo eus an XIXvet hag XXvet kantved a zo genidik eus Roazhon, evel Paol Feval, pe o deus bevet enni, evel Lan-

gleiz, hag o deus roet lufr dezhi evel-se. Evit se e tleer meuliñ an aozer rak peurvuiañ ne ra ar skrivagnerion a sav levrioù a seurt gant hemañ nemet menegiñ Kastellbrien pe Duguay-Trouin (pa n'eo ket Gwesklen) pa vez anv a dud-vrudet hor bro-ni.

Liant ha fraezh ez eo bepred yezh ar skrivagner ha lennet e vez e oberenn gant plijadur dalc'hmat.

Y.O.

KERNARO.- Kevrin Kerbrug.- Hep lec'h, hep embanner (1980).- In-8°, 151p. (embannet gant an aozerez).

Gant an aozerez eo bet embannet an dastumad skridoù-mañ, e-lec'h e kaver an doare gallek keñver-ha-keñver gant an hini brezhonek, ur c'hiz eus deroù ar c'hantved ha na vez ket mui heuliet nemeur hiziv, ha n'omp ket a-du tre ganti, forzh penaos ; gwell e vefe, d'hor soñj, ober daou embannadur distag eus ur seurt oberenn, evel m'en deus graet Erwan ar Menga evit Emziskouezioù ar Werc'hez, lakaomp ; gwir eo ez eo keroc'hik daou embannadur dister eget unan tevoc'h met plijusoc'h eo evit al lenner brezhoneg kaout ar skrid brezhonek hepken : a-hend-all e vez tentet bepred da lurchañ war-du ar skrid gallek(ar pezh a zo skuizhus)

Un druez eo koulskoude n'eo ket anavezet muioc'h an oberenn-mañ rak talvezout a ra ar boan bezañ lennet. Evidon-me on bet plijet dreist-holl gant ar varzhoniezh a gaver en dastumad-mañ, a zo relijiel ha brogar hec'h awen, nemet savet en ur yezh flour ha reizh-kenañ, start ha resis, gwerzaouet ivez gant kalz a ampartiz. Gouzout a ra ar skrivagnerez ober

gant ar c'hlotennoù, hag ar c'hlotennoù-dibenn peurgent, en un doare akuit ivez; ar seurt gwerzaouerezh ne vez ket pleustret kalz hiziv ha padal, ret eo lavarout, reiñ a ra hevelep reizh muioc'h a nerzh da yezh ar barzh (bez' he deus ar skriva-gnerez a-hend-all savet ur geriadur klotennoù a vo embannet a-barzh pell, spi hon eus). Hogen gouest eo ar varzhez kerkoulz all da ober gant kelluskoù skeudennus a glot ervat gant ar soñj hag an trivli a fell dezhi diavaezañ, evel er pezh Anken ha Peoc'h:

Bale ' reomp well-wazh
 Nozvezhioù teñval
 Hep diwall.
 A ! Devezhioù du
 Hep repu,
 Gwasket hor c'halonoù
 Hep gouloù...

(Notomp a-hend-all ez eo kalz gwell ar skrid brezhonek orin e-unan eget an doare gallek anezhañ, evurusamant ; gant Per-Jakez Helias, ur barzh divyezhek, eo ar c'hontrol a c'hoarvez, siwazh).

Diegi am boa da lenn - pe, kentoc'h, da adlenn rak dija eo bet embannet ar skridoù-mañ, ar pezhioù -c'hoari a zo stag ouzh ar varzhoniezh. Koulskoude ez eo dudius Kevrin Kerbrug penn-da-benn, aozet ha maz eo evel un 'detective Story', un doare lennegezh bet pleustret meur a wech gant hor skrivagnerion, dreist-holl avat gant Roparz Hemon. Anzav a ran ez eo en istor polis kontet e-barzh Kevrin Kerbrug em eus kavet ar brasañ deur hag en em c'houlenn a ran ha ne vije ket bet koulz d'ar skrivagnerez sevel war-eeun ur romant-polis kentoc'h eget ur pezh-c'hoari (re hir eo tennadoù zo

lakaet e genoù an tudennoù a-wechoù, da skouer). Padal eo frammet mat an oberenn ha chom a ra evezh al lenner stag ouzh an destenn (un istor karantez a-hend-all) betek ar penn.

En dastumad-mañ e kaver ivez "Eured al Logodenn" a zerefe a-walc'h ouzh un abadenn margodennoù, a seurt gant ar re a zo bet embannet gant Roparz Hemon gwechall e-barzh AR BED KELTIEK. Yannig a vefe ur pezhig-c'hoari all, istorel e destenn, awenet gant emsav Ar Roueri ; n'eo ket ken pouezus ha Kevrin Kerbrug met lennet e vez gant plijadur evel egile.

Spi hon eus he devo ar skrivagnerez tro da embann oberennoù all rak seblantout a ra bezañ donezonet evit skrivañ.

Y.O.

+++++

DIELLOU O. TENNAÑ DA ISTOR AN EMSAV

Amañ da heul e vo kavet ul lizher kaset gant Loeiz Herrieu da Langleiz e 1949 hag a skeudenn mat an trubuilhoù gouzañvet gant ar vrogarourion vrezhon goude ar brezel ; gouzout a reer en doa ranket Loeiz Herrieu chom kuzhet e-pad ur pennad goude ma oa distroet an amaezhiezh gall eus renad De Gaulle er vro.

=====

13 a viz Du 1949

Kereil ker,

Ret eo bet din diloj arre evit an eizhvet gwezh a-c'houde 1944. Kement-se en deus parret a-ziouzhin a respont koulsoc'h d'ho lizher. Bremañ ec'h omp en Alre, en un tiig bihan, kavet gant kalz a boan. Re vihan eo siwazh ! evit gallout degas dezhañ ma ma faperioù ha levroù, ar re n'int ket bet laeret pe dizabaldet gant "gouroned Charlez Hir", ha lakat urzh enne hag em c'hontoù. Ha tu ebet nen deus din d'en em lakaat arre ar-dro Dihunamb nag he moula-dennoù.

Un embannour arall en deus kinniget din ober un advouladenn ag Ar an Daoulin, met respontet em eus dezhañ ne oan ket soñjet evit c'hoazh d'he ober. A-dra-sur, mar bez ret din goulenn harp unan bennak evit kement-se e vo deoc'h e komzin kentañ. Din-me ec'h aparchant atav ar gwir d'embanniñ al levr met tud arall o deus o ger da lavarout, mar kargan un arall da gemer ma lec'h.

Er stad mazh on, dispartiet diouzh ma faperioù retañ, hag atav dindan samm ur varn direizh, n'hellan netra a vat nemet sellout gant plijadur ouzh al labour a c'hell ober ar re a zo diliamm evel-doc'h. Brav eo, sur, ar pezh en deus gallet ober

B.A.L.B. evit straviñ al levroù brezhonek. Vad a ra din ivez gouiet hoc'h eus bremañ ul lec'h e SKOL AN ARZOU KAER hag emañ stank ho selaouerion. Vel-se e chom bepred bev ar spered broadel.

Klevet em eus doare ag ar c'hamp gant M... James ha Trehorn (?), bet amañ un devezh ganimp. Un doare mat arall : mam breur-kaer Ar Meliner, kondaonet d'an heklabourioù hed e vuhez ha lamet gantañ e holl vadoù, a zo bet advarnet e Pariz, bout zo eizh teiz, ha kavet dibec'h kaer gant ar varnerion. Ul levnezh evit e dud ! E vezer ivez oc'h en em sour-si ac'hanon-me... Met na hir e kavan...

Bennozh-Doue deoc'h a vremañ evit ar soñj hoc'h eus da gas din ho levr "Enez ar Rod" : n'int ket stank al levroù brezhonek moulet a nevez !

Hon gourc'hemenoù gwellañ, mar plij, d'an Itron de Langlais, hag a spered hag a galon ganeoc'h en ho labour kaer evit hor bro.

Loeiz Herrieu

Gellout a rit kas pep tra d'ar chomlec'h ; Mme Henrio, 19 rue des Fèves, Auray.

NOTENN

SKridaozet eo al lizher-mañ en un doare brezhoneg peurunvan, gant -zh- a-wechoù, liesterioù en -où- ha stummoù a seurt gant -ataw- e-lec'h -atav- tost a-walc'h a-hend-all d'an eilvezh wenedek a vez komzet en-dro d'an Henbont, moarvat.

Ur wech bennak e vo tu da embann ul luc'hskrid eus al lizher e-unan evit ma c'hello al lenner keñveriañ gant ar skrid end-eeun.

oooooooooooo

Lennet o devo hol lennerion ur rentañ-
kont eus obererezh OALÉD SANT-ERWAN er
c'helaouennoù brezhonek. Amañ da heul e
lakaomp an eurvezhioù maz eo digor :

Bep lun : 17 eur 30 - 19 eur 30
Bep meurzh : 18 eur - 20 eur
Bep merc'her : 14 eur - 16 eur
Bep yaou : 18 eur - 19 eur 30
Bep gwener : 17 eur 15 - 18 eur 15

Chomlec'h : 28 straed Charles-Berthemot, BREST
Embann a raimp an danevell en un niverenn all eus
ar gelaouenn.

=====

KEMENNADENN A-BERZH AR C'HEVRE KELTIEK, kentelioù
da zeskiñ iwerzhoneg :

Ha c'hoant hoc'h eus da zeskiñ iwerzhoneg ? Da c'houzout
hiroc'h diwar-benn sevenadur Iwerzhon ?

Ur skol-hañv a vo en eil hanter a viz Eost evit tud o te-
raouiñ da zeskiñ ar yezh.

Lec'h : Colaiste Chonnacht, An Spidéal (Spiddal), Conamara
16 klm. bennak er C'hornog eus Galway.

Deiziadoù : ar studierion a zegouezho d'ar sadorn 15 a viz
Eost 1981 hag a yelo kuit en-dro d'ar gwener 28 a viz Eost.

Kinniget e vo 30 eurvezhiad kentelioù iwerzhoneg.

Ouzhpenn-se e vo aozet : preegennoù, kentelioù koroll,
abadennoù arz poblek (kanaouennoù, danevelloù, dañsoù).

Un droiad heñchet dre Gonamara.

Priz : 190 lur iwerzhonat (war-dro 1500 lur gall, pep tra
enkantet ; da rakpaeañ : 25 Lur iwerzhonat (war-dro 200 Lur)

Chomlec'h da gas an arc'hant : Mâire Bhreatnach, 58 br.
an Bhainth, Cabrach, Ath Cliath 7 a-rack ar 1añ a viz Mezheven
1981. Restaolet e vo ar rakpae d'ar re en em zislavarfe kent
ar c'hentañ a viz Gouere.

+++++

Moulet gant ar gelaouenn

Ar rener:Y.Ollivier

CPAPP : 50 015

